

# AR STOTÉREZ

WAR DON : *Ar Pillaouer*

Gizioù brao a deu er vro-man,  
E-touez merc'het ha grwagé; (hadlavarout)  
Mez ar braoa eo, e grédan,  
'N hini vo kanet hérié. .

Foei, foei, foei d'ar stotérezed  
Zo oc'h ober mez ar vro. (Hadlavarout)

Gwééh-all na évent 'met goaven,  
Goaven téo war ho c'hafé,  
Bréman, é fel d'ho c'horzaillen  
Béa skrapet gant dour-kré.

Ebars ann hostaliriou  
A wéler merc'het faro,  
Azéet endro d'an toliou  
Evit lonka mikamo.

Pa dé tapet ar c'hustum-zé,  
Eva réont 'vel paotr-é  
Ha gwélet veint prestik goudé  
Gant ho boutail o kousket.

Ha neuzé chomont n' ho gwelé,  
An deiz koulz ével an noz,  
Bouzar euz garm ar vugalé  
Hag euz mouéz an oac'h a groz.

An dewez bennag pa zavont  
E veint kavet 'n eun endouf,  
Botou aman, ha kouef du-hont,  
'N ho dorn eur voutail distouf.

Adalek kouézet ken izel,  
Ar plac'h zo kollet a grenn,  
Ha bemdeiz 'bars ar guerneugel,  
Bemdeiz dounoc'h a diskenn.

Brud 'zo deuz eur Bleuvihanez  
— Ho ! gwas a plac'h didalvez ! —  
Péhini zo er Feuntanez  
Oc'h ober ar gwall vuhez.

Eun deiz bennak ar gantouillen,  
War an hent, a diwiskaz  
Kément tam oa war hé c'hroc'hen,  
Hag ac'h eas d'ar bourk en noaz.

Eet eo bréma évit eur miz  
En Kaer Lanhuon d'an toul :  
Nag a hini a c'heuil hé giz,  
'N tré Landréger ha Pempoul ?

Zioaz ! zioaz ! pa vo évet  
An dour kréne 'bars en pép ty,  
Dinerz a vo an oll baotret  
Hag an holl merhet kasti.

Pesort bugalez a zavo  
Diwatoe'h en Breiz-Izel ?  
Ar gwin arden hon distrujo  
Gwel' 'vit bosen ha brézel.

War an tu fall 'man Breiz-Izel,  
Kouls braz eo d'imp béa fur :  
Réd vo zenti ouz ar roc'hel,  
Mar na rer ket ouz ar stur.

ERWAN BERTHOU.